

**KENVREURIEZ
AR
BIEZONEG**



Nº 24

Kenvreuriez ar Brezoneg
Eskopti Kemper ha Leon

K A I E E 24

Tre ha lano.....	I95
28 ed war ar bloaz A.....	I97
29 ed SUL war ar bloaz A	200
30 ed SUL war ar bloaz A.....	203
31 ed SUL war ar bloaz A.....	206
32 ed SUL war ar bloaz A.....	209
33 ed SUL war ar bloaz A.....	212
GOUEL AR C'HRIST ROUE A.....	215

oooooooooooooooooooo

Feb tra a dremen.....	I/24
Kenavo d'an eürusted.....	I/24
Pedenn diouz an noz.....	2/24
Bennoz dech, va Doue.....	3/24
Al lealded.....	4/24
Sent karet or Breiz-Izel.....	5/24

oooooooooooooooooooo

Evid kourmananti da GAIEROU KENVREURIEZ

AR BREZONEG :

Job Seite - 29249 Guissény

C.C.P. I738-66 RENNES

T R E

HA

L A N O...

Eun dervez e oa eun den, diouz kostez ar Hreizteiz, deuet da bourmen war aochou Breiz. Souezet braz oa bet o welad ar mor o vond war a-dreñv, gand an tre, gand an dichal a lavar Gwenediz.

- Petra, emezañ, ema ar mor o vond kuit euz an aod ?

- Bezit dineh, eme dezañ eur martolod, dond a ray endro en aod; diou wech bemdez ez a evelse war adreñv: mare an Tre ha diou wech e teu endro: mare al Lano...

Hag e sonjen ennon va-unan. Evid ar brezoneg eo ar memez tra. Bremañ ez eus eun neubeud bloaveziou, pa oe roet aotre da ober implij euz ar yezou el liderez, e-leh al latin, setu m'om bet beuzet gand eur mor a levriou gallek hag an oll da ober implij euz ar galleg. Skarzet e oa euz on ilizou ar brezoneg, nemed evid eun neubeud kantikou. Lakom eun tamm "Jezuz pegen braz ve" evel ma vez lakeet holenn ha pebr er zoubenn. Prezegenn ebéd ken e brezoneg, evel-just, nebeutoh c'hoaz, mar deo posubl, overennou e brezoneg. Maro e oa ar brezoneg en ilizou, pe dost... Mare an tre...

Ha setu digorèt mare al lano... Tarziou gwenn a z'war ar mor o skei war-zu on aochou. Brest a zo o tigeri hent gand an overennou e brezoneg e parrez Sant MARK, epad ar Horaiz. Nebeud amzer goude, overenn e brezoneg beb miz, overenn diou wech ar miz, en eur chapelig distro, araog galloud beza digemeret e iliz vraz Sant Martin. Kemper a zeu da heul, lentoh, beb miz.

Med evel eur hleñved speguz, setu an overennou e brezoneg o hounid tachenn, dre zil, evel ar mor o sevel a-dreuz ar rehier hag ar bezin. An overennou radio pe T.V. o deus bet kalz levezon. Diskouezet o-deus e heller pedi e brezoneg, desket o-deus d'an dud an toniou nevez. Diskouezet o-deus e plij kenañ da galz tud an Overennou e brezoneg ha setu dinehet ar re a oa en arvar. Kontet on-deus: ouspenn 80 parrez o-deus bet bremañ, gwech pe gwech, an overenn e brezoneg hag e meur a hini anezo eo bet roet lañs hag e vez enno eur wech an amzer, stankoh-stanka, overennou e brezoneg. Picu e-nefe kredet kemend-all, netra nemed pemp bloaz a zo ?

Gwir eo, e kaver bremañ, gand embannaduriou KENVREURIEZ AR BREZONEG, kement a zo red evid al liderez e brezoneg. N'eo ket echu c'hoaz he labour. Ne vo ket echu gwech ebéd, med mond a ra war araog.

Tre ha lano....

chal ha dichal...

K. ar B. here 72

28 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Eul lein vraz a bourchaso an Aotrou
ha seha a ray o daelou d'an oll.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZALAZ 25 /6-10a

6. En deiz-se, an Aotrou, nestr ar bed,
a bourchaso evid an oll boblou war ar menez-mañ,
eul lein vraz a gig druz hag a win mad,
eul lein vraz a gig tener euz ar henta,
hag a win dilavet mad.
7. War ar menez-mañ, e rogo ar ouel a hronne an oll boblou,
hag ar pallen o goloc.
8. Distruj a ray ar maro evid atao;
hag an Aotrou a zeho an daelou war an oll dremmou,
hag e tilamo kuit diwar e bobl,
an dismegañs taolet warnañ dre ar bed arbez,
rag Doue eo e-neus hen lavaret.
9. Hag e vo lavaret en-dei-se:
- Setu on Doue;
ennañ edo or fizianz, or zaveteet e-neus,
Doue, edo on esperañs ennañ.
Bezom el levenez, bezom laouen,
rag or zaveteet e-neus,
rag dorn Doue a ziskuizo war ar menez-mañ.

SALM 22

I-3a, 3b-4, 5-6

Doue eo va fastor,
ne vanko din netra;
rag war ar peuri druz,
am has da ziskuiza.

gw. Breiz a gan N°3 p.36-s.13

1. An Aotrou eo va fastor, n'am eus diouer a netra.
2. War ar prajou geot tener, e ra din gourvez;
daved doureier an diskuiz e kas ahanon,
ha nerz fresk a ro d'am ene.
- 3b Va heñcha 'ra dre ar gwennojennoù surra, evid enor e ano.
4. Ha pa rankfen kerzed dre stankenn an Ankou,
n'am eus aon rag droug ebet, rag c'hwi 'zo ganin.
Ho penn-baz hag ho kwalenn am laka dineh.
5. Evidon e lakit an daol, dirag sellou va enebourien;
an eoul c'hwéz-vad a skuillit war va fenn,
ha va halir (pe:va skudell) a zo leun-barr.
6. Eürusted, gand ho madelez a vo va lod, bennez 'hed va buez;
digemer a gavin e ti an Aotrou, epad hir amzer.

oooooooooooooooooooo

EIL LENNADENN - Gouest on da ober peb tra en hini a ro nerz din.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER FILIP

4/I2-I4, I9-20

- I2. Va breudeur, gouzoud a ran beva en dienez
ha beva, pa n'am eus ezomm a netra;
e peb amzer hag e peb doare,
am-eus desket beva gand re ha gand re nebeud.
- I3. Gouest on da ober peb tra en hini a ro nerz din.
- I4. Ha goulskoude, mad ho peus greet o tond da gemer perz em dienez.
- I5. Ha va Doue a bourvezo, gand largentez,
en eun doare dispar, d'hoh oll ezommou,
hervez e binvidigez, en Aotrou Krist Jezuz.
20. Da Zoue, on Tad, eta, gloar da virviken. Amen !

ALLELUIA ! alleluia ! Ho Komz a zo gwirionez,
grit ma vim gouestlet deoh dre ar wirionez. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

23/I-I4

- I. Jezuz a lavaras e doare parabolenn:
2. - Heñvel eo rouantelezh an Neñvou,
ouez eur roue oh ober lein-eured gand e vab.
3. Kas a reas e zervicherien da helver d'al lein
ar re a oa bet pedet,
med ne fellas ket dezo dond.
4. Kas a reas c'hoaz zervicherien all,
en eur lavared dezo:
- Lavarit d'ar re a zo pedet:
Setu ! Pourchaset eo ar pred,
prest eo peb tra, deuit d'ar friko !
5. Med ne rejont ket van,
hag e ajont, unan d'e bark, unan all d'e genverz.
6. Ar re all a bakas krog er zervicherien,
a wallgasas anezo hag o lazaz.
7. Ar roue a yeas droug ennañ,
hag en kas e zoudarded, rei urz da laza ar vuntrerien
ha da lakaad an tan en o hêriadennou.
8. Lavared a reas neuze d'e zervicherien:
- Prest eo al lein-eured, med ar re a oa kouviet
n'oant ket din da zond.
9. It eta dre ar hroaz-heñtchou,
ar re oll a gavoh war ho hent,
pedit anezo da zond.
10. Ar zervicherien a yeas eta dre an heñtchou,
a zastumas ar re oll a zigouezas ganto, mad ha fall,
hag ar zal-eured a oe leuniet a gouvidi.
11. Ar roue a antreas da weled ar re a oa ouz taol;
gweled a reas unan ha n'e-noa ket warnañ e zae-eured,
hag e lavaras dezañ:
12. - Va mignon, penaoz 'ta ez out antreet amañ,
heb kaoud warnout da zae-eured ?
Ne lavaras grig.
13. Neuze e lavaras ar roue d'ar zervicherien:

- Liammit dezañ e zaouarn hag e dreid
ha taolit anezañ er miz, en deñvalijenn.
Eno e vo daleou ha skrignadeg- dent,

14. Rag kalz a zo galvet, nebeud avad a zo dibabet.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Emaom ouz ho pedi, Aotrou Doue: ra zeuio deom ho kras,
dalhmad araog ha da heul peb ober,
ma vim douget ganti bepred d'an oberou mad.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoc'h ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, digemer pedennou ho tud fidel,
war- eun-dro gand provadenn ar Zakrifikis:
evid ma talvezo deom an Overenn heuliet gand gwir devosion,
da errucud eun deiz e gloar ar baradoz.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedomm oll a-unan...

Aotrou Doue, uhel dreist peb tra,
c'hwi a bedom hag a aspedom:
evel ma vagit ahanom gand Korv ha Gwad Santel or Zalver,
grit deom ivez kaoud perz en e vuez-Doue.

Eñ on Doue beo ha leun a hloar,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

29 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - An Aotrou Doue e-neus renet ar roue Siruz,
dre e zorn, evid lakaad da blegañ dezañ ar poblou.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS. 45/1,4-6

1. Komz Doue d'ar roue Siruz,
e-neus sakret,
e-neus renet dre e zorn deou,
evid lakaad ar poblou da blegañ dezañ,
ha terri galloud ar rouaned,
evid digeri frank dirazañ an noriou,
rag ne jomo dor ebed serret.
4. Ablamour da Jakob, va zervicher,
ha da Israel dibabet ganin,
am-eus da halvet dre da ano,
roet am-eus dit eun ano enoruz,
pa n'az-poa anaoudegez ebéd ahanon.
5. Me eo an Aotrou ha n'eus nikun all ebéd,
n'us Doue all ebéd nemedon.
Da rentet am-eus gallouduz,
pa n'az-poa anaoudegez ebéd ahanon.
6. Evid ma ouezfed euz ar zav-heol d'ar huz-heol,
eo me an Aotrou ha n'eus hini all ebéd.

SALM 95 / 1-2a, 2b-3, 7-8a, 9-10ac

Grit brud, e-touez an oll boblou,
d'an traou kaer 'neus greet Doue

1. Savit d'an Aotrou Doue eur han nevez,
meulit an Aotrou dre bevar horn ar bed.
- 2a Roit meuleudi d'an Aotrou ha mil bennoz d'e ano.
- 2b Bemdez, roit da anaoud e zilvidigez;
grit brud d'e hloar e-touez broadou an douar,
d'an oll boblou displegit e vurzudou.
7. Dougit 'ta, broadou a beb gouenn, dougit d'an Aotrou gloar ha galloud;
- 8a dougit d'an Aotrou an enor dleet d'e ano.
9. Deuit, gand ho kwiskamanchou sakr, d'adori an Aotrou;
krenit dirazañ gand doujañs, tud an douar a-bez.
10. It da lavaroud d'ar broadou: Roue eo an Aotrou Doue !
gouarn a ra an oll boblou hervez ar justis.

oooooooooooooooooooo

EIL LENNADENN - Sonj am-eus euz ho feiz, euz ho karantez
hag euz ho esperañs.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN TESALONIK. 1/1-5b

1. Ni Paol, Sivan ha Timote, deoh Iliz Tesalonik,
a zo e Doue an Tad hag e Jezuz Krist, an Aotrou,
ra vo ganeoh gras ha peoh !
2. Heb ehan e lavarom bennoz da Zoue,
ablamour deoh oll,
en eur ober meneg ahanch en or pedennou.
3. Heb ehan e tigasom da zonj dirag Doue on Tad
pegen beo eo ho feiz,
pegen aketuz ho karantez,
pegen stard hoh esperañs,
silet ennoh gand Jezuz Krist.
4. Ni a oar, breudeur ken karet gand Doue,
ez oh bet dibabet gantañ.
5. Rag ol labour aviela en ho touez,
n'eus ket bet anezañ komzou hebken,
med, da heul, burzudou,
labour ar Spered Santel,
hag eun asurañs heb douetañs.

ALLELUIA ! alleluia ! Yann 8/12
Me eo Sklerijenn ar bed;
an neb a gerz d'am heul
e-no sklerijenn ar vuez. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 22/15-21

15. Ar farizianed a glaskas kenetrezo an tu
da lakaad Jezuz d'en em zislavared en e gomzou.
16. Kas a rejont d'e gaoud diskibien dezo,
ha ganto re all euz kostezenn Herodez.
- Mestr, emezo da Jezuz, ni oar ez oh eun dén eeun,
hag e kelemnit hentchou Doue gand lealded,
heb taoler kont euz an dud,
nag euz ar péz a zeblantont beza.
17. Petra sonjit ?
Daoust hag aotre a zo pe gêt da baea taillou da Zezar ?
18. Jezuz avad o weled o fallagriez a respont:
- Tud froz ahanch, perag e klaskit paka ahanon ?
19. Diskouezit din péziou-moneiz an taillou."
Diskouez a rejont eun diner.
20. Ha Jezuz dezo:
- Skeudem hag ano piou a zo war ar péz-moneiz ?
21. - Re-Zezar, emezo.
Neuze e lavaras Jezuz:
- Rentit da Zezar ar péz a zo da Zezar,
ha da Zoue ar péz a zo da Zoue."

oooooooooooooooooooo

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, roit deom ar hras
da ouestla deoh or bolontez bepred,
ha da zervij ho kloar gand eur galon leal.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma kinnigim deoh a wir galon
ar provou-mañ on eus bet diganeoh;
pa n'eus nemed ho kras evid or gwalhi euz ar pehed,
ra vim santelleet dre Vister Sakr an aoter,
a gemerom perz ennañ.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, grit deom tenna or mad
euz teñzor traou an Neñv a dostaom outo en Overenn,
evid ma kavim er bed-mañ skoazell ho krasou,
ha ma vim heñchet warzu an eürusted peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

oooooooooooooooooooo

30 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Diwall da veza kriz e kenver an intañvez hag an emzivad!
Warnoh e tirollo va hounnar.

LENNADENN EUZ LEVR AN EXOD

22/20-26

- War menez Sinaï, e komzas Doue evelhenn:
20. - Ne wall-gasi ket an estrañjour,
a zo o chom ganit,
ha ne ri ket a boan dezañ;
c'hwi hoh-unan a zo bet estranjourien e Bro Ejipt.
21. Ne vezi ket kriz e kenver an intañvez hag an emzivad.
22. Ma waskeze anezo ha ma teuont da glenn ouzin,
e selaouin o hlemmou.
23. Diroll a ray va hounnar hag e rin deoh mervel dre ar hleze,
ho kvragez a zeuio da veza intañvezed
hag ho pugale da emzivad.
24. Ma prestez arhant da unan bennag euz va fobl,
da eur paour e-touez da vreudeur,
ne vezi ket en e genver evel eur prester war gampi,
ne houlenni interest ebéd digantan.
25. Ma kemereze mantell da nesa e-kred,
e renti anezi dezañ araog ar huz-heol.
26. N'e-neus netra all da lakaad,
hennez eo ar pallenn a laka endro d'e gorv,
gand petra e hello kousket ?
Ma teu dezañ krial ouzin,
e zelaou a rin rag me a zo leun a druez.

SALM 17

2-3a,3bc-4,47,51ab

Un Doue hebken a adori
ha dreist peb tra oll a gari.

2. Ho kared a ran, Aotrou Doue: c'hwi 'zo va nerz,
3a. c'hwi 'zo va roh stard, va hastell ha va divennour.
- 3bc. Va Doue, c'hwi ar roh a ro din repu, c'hwi va skoed-brezel,
korn gallouduz d'am zavetei, va zour kreñv.
4. Pedet am eus an Aotrou, meulet ra vezo !
ha saveteet on bet diouz va enebourien.
47. Meuleudi d'an Aotrou ! Bennoz dezañ, va roh stard !
Ra vo milmeulet Doue, va Zalver !
51. Eñ a lak e roue da hounid treh dispar,
hag a daol e vadelez war an den sakret gantañ.

oooooooooooooooooooo

EIL LENNADENN - Troet ho peus kein d'an doueou faoz, evid servicha ar gwir Doue,
ha gortoz donedigez e vab Jezuz.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN TESSALONIK. I/5c-10

- 5c. Va breudeur, c'hwi a oar penaoz em-eus bevet,
en ho touez, en ho servich.
6. Ha c'hwi a zo deuet da gemer skouer diwarnom,
ni hag an Aotrou,
en eur zigemer ar gomz e-touez kalz a drubuillou,
gand laouenedigez er Spered Santel.
7. Evelse ez oh deuet da veza eur skouer
evid an oll dud a feiz
EUZ AR Masedoan hag ar Gres a-bez.
8. Komz an Aotrou, n'eo ket hebken er Masedoan
hag er Gres a-bez, eo e-neus tregernet azaleg ho pro:
med ar helou euz ho feiz e Doue,
e-neus redet dre oll,
e seurt doare,
ma n'on-eus netra mui da lavaret diwar he fenn.
9. Du-ze e vez lavaret penaoz ho peus on digemeret,
penaos ez oh bet troet ouz Doue,
en eur drei kein d'an doueou faoz,
hag ho peus lakeet en ho penn
servicha an Doue bec ha gwirion,
10. ha gortoz euz an Neñvou e Vab,
e-neus savet a-douez ar re varo,
Jezuz on diarbenn diouz ar gounnar a zo o tond.

ALLELUIA ! Alleluia ! Meuleudi en ano an Aotrou
d'an hini a zeusor roue!
Pech en Neñvou ha gloar d'an Uhel-meurbed !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

22/34-40

34. Ar Farizianed, o klevet e-noa Jezuz greet d'ar Zaduseaned chom pech,
en em vodas,
35. hag unan anez, doktor war al lezenn,
a reas eur goulenñ ouz Jezuz evid e amproui:
36. - Mestr, pehini eo ar gourhemenn brasa el lezenn ?
Jezuz a respontas: dezañ:
37. - Kared a ri an Aotrou da Zoue,
euz da greiz da galon,
euz da oll ene ha da oll spered.
38. Hennez eo ar brasa hag ar henta euz ar gourhemennou.
39. An eil a zo par dezañ:
kared a ri da nesa evel d'out da unan.
40. Kement a zo em lezenn hag er brofeted,
a zeu euz an daou gourhemenn-se.

oooooooooooooooooooo

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
kreskit ennom ar feiz, an esperans hag ar garantez;
hag evit ma hellim kaoud ar pezh a brometit,
grit deom kaoud evidoh karantez awalh,
evid heulia a-zevri ho kourhemennou.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVCU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, tacler ur zell a vadelez,
war ar provou a ginnigom deoh amañ;
ar Zakrifis lidet ganeom, ho servicherien, ra dalvezo
dreist pep tra evid enor ho kloar.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom asamblez...

Emaom ouz ho pedi c'hoaz, Aotrou Doue,
ra labouro ennom, 'hed or buez, vertuz an Overenn hag ar Gomunion;
ar pezh a lidom bremañ dindan spesou ar Zakramant,
grit ma welim anezañ, eun deiz, dizolc e splannder an Neñv.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

oooooooooooooooooooo

3I ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Troet oh diwar ar mad,
lakeet ho peus al lezenn da veza eun abeg a behed evid kalz tud.

LENNADENN EUZ AR PROFED MALACHI I/14b-2/2 ,8-10

- I/14b Me a zo eur roue braz ,eme an Aotrou Doue,
mestr ar bed,
ha va ano a zo da veza doujet e-touez ar poblou.
- 2/I Ha bremañ,beleien,taolit evez !
2 Ma ne zelaouit ket,ma ne deuit ket a greiz-kalon,
da renta gloar d'am ano,
eme an Aotrou Doue,mestr ar bed,
e taolin malloz warnoh ha war ho pennoziou.
8. Troet oh diwar an hent,
lakaet ho peus al lezenn da veza eun abeg a behed,
evid kalz a dud.
Mastaret ho peus va emgleo ganech,
eme an Aotrou Doue,Mestr ar bed.
9. Diouz va zu,em-eus kollet dech ho prud,
hag ho tismeganset dirag an dud;
peogwir n'ho peus ket heuliet va heñtchou,
ha peogwir ho peus lakeet al lezenn
da veza êz pe êsch da vired evid tud a zo.
10. Daoust ha n'on-eus ket oll an heveleb tad ?
Daoust ha n'eo an heveleb Doue eo e-neus or hrouet ?
Perag eta beza trubard an eil e keñver egile,
ha mastara evelse an emgleo greet gand on tadou ?

SALM 130 I,2,3.

Mirit va ene e peoh,
en ho kichenn,Aotrou Doue !

1. Aotrou Doue,n'eo ket otuz va halon,
na faeuz va daoulagad,
ne glaskan ket ober traou braz,
na burzudou dreist va galloud.
2. Mired a ran va ene er peoh hag er sioulder.
Evel eur bugelig goude dena,tamolodet ouz e vamm,
evel eur bugelig,goude dena,ena va ene em hreiz.
3. Esperoud a ra Israel en Aotrou Doue,
bremañ ha da viken.

oooooooooooooooooooo

EIL LENNADENN - Karoud a rafen rei deoh n'eo ket hebken Aviel an Aotrou Doue,
med kement a zo ahanon.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN TESALONIK

2/7-9,13

7. Va breudeur, leuna zousder ez on bet ganeoh,
evel eur vamm o vaga he bugaligou,
hag oh intent outo gand karantez.
8. Gand eur seurt karantez evidoh,
ni a garfe rei deoh,
n'eo ket hebken Aviel an Aotrou Doue,
met kement a zo ahanon,
ken tamm ma 'zom deuet da veza ouzoh.
9. Sonj ho peus, va breudeur, en or poaniou, en or skuizder,
labouret on-eus noz-deiz,
da vired na vem eur zamm evid nikun ahanon,
epad ma prezegem deoh aviel an Aotrou Doue.
13. Ha setu perag, diouz on tu, ne ehanom da lavared bennoz da Zoue.
P'ho peus resevet komz Doue diwar or muzellou,
ho peus he digemeret, n'eo ket evel eur gomz a-berz an dud,
med evid ar pezh ma 'z eo e gwirionez
komz Doue a zo o labourad ennoh,
c'hwi ar re o deus feiz.

ALLELUIA ! Alleluia ! Aotrou Doue, digorit or halon,
evid na klasko gand karantez
komzou ho mab.

Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE.

23/I-12

1. Jezuz a zisplegas kement-mañ d'ar bobl ha d'e ziskibien:
2. - Ar skribed hag ar farizianed a gelenn
diwar gador Moizez.
3. Grit eta ha mirit kement a lavarent deoh,
n'it ket avad da gemer skouer diwar o oberou,
rag lavared a reont ha ne reont ket.
4. Liamma a reont sarmou pounner,
ha karga anezo war ziskoaz an dud,
int-i avad o-unan, ne fell ket dezo
chench plas dezo gand penn o biz.
5. Kement a reont a zo evid beza gwelet gand an dud.
Dougen a reont warno rubanoù ledan,
enno pennadoù-skrid euz al Lezenn,
hag ar fleñch ouz o mantilli a zo hir-kenañ.
6. Klask a reont ar plasou a enor ouz taol,
hag ar plasou kenta er sinagogoù.
7. Plijoud a ra dezo beza saludet gand an dud
war ar plasennou
ha beza anvet rabbi ganto.
8. C'hwi avad na rit ket rei dezo an ano a rabbi(mestr),
rag breudeur ez oh oll ha n'ho-peus
nemed eur mestr evid ho kelemn.
9. Na roit da zen war an douar an ano a dad,
rag n'ho peus nemed eun tad, an hini a zo en Neñvou.

- IO. Na rit ket kennebeud rei deoh an ano a zoktor,
rag n'ho peus nemed eun doktor:ar Hrist.
- II. An hini brasa en ho touez a vo ho servicher.
- I2. Rag an neb piou bennag en em uhella a vo izelleet
hag an neb piou bennag en em izella a vo uhelleet.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha leun a drugarez,
dre ho kras eo e hell ho tud fidel ho servicher ervad;
grit deom eta kerzed founnuz, heb koueza morse,
war an hent a gas d'an eürusted ho peus prometet.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganech ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken . AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganech, Aotrou Doue, ma vo ar Zakrifis-mañ,
eur brovadenn divlam evidoh,
hag evidom eur varmenn a krasou diwar ho madelez.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR COMUNION

Ni ho ped, Aotrou Doue, da greski ennom
labour ho kras evid santellaad or buez;
maget er Zakramant gand ar bara euz an Neñv,
ra vim lakeet muih-mui e stad da hounid an eürusted,
on eus ennañ ar bromesa hag an tañva.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

oooooooooooooooooooo

32 ed SUL WAR AR BLOAZ A

LENNADENN GENTA - Kavet e vez ar Furnez gand ar re he hlask.

LENNADENN EUZ LEVR AR FURNEZ

(Sag. 6/I2-I6)

- I2. Skeduz eo ar furnez ha ne goll ket he luf.
Lezel a ra ar re a gar anezi da zelloud outi.
hag ar re he hlask d'he havoud.
- I3. En em ziskouez a ra dezo,
araog m'o devez displeget ar c'hoant d'he gweled.
- I4. An hini a zo war glask anezi
kerkent ha goulou-deiz,
n'e-no ket da vond skuiz,
he havoud a rei azezet e-tal e zor.
- I5. Beza dalhmad o sonjal enni
a ziskouez eo fur an dên,
an neb a jom da veilla en heh enor,
a vo buan dineh e spered.
- I6. Mond ha dond a ra war glask euz ar re a zo din anezi;
para 'ra dirazo war an hent, lacuen he dremm.
Beb tro ma sonjont enni e teu en arbenn dezo.

SALM 62

2,3-4,5-6,7-8

Sehed ahanoh am-eus, va Doue,
sehed ahanoh am-eus, va Doue.

2. Aotrou Doue, c'hwi 'ze va Doue,
c'hwi a glaskan kerkent ha goulou-deiz.
Sehed ahanoh e-neus va ene, dizeha 'ra va horv hebdoh,
evel ma teu an douar heb dour da graza ha da skarnila.
3. En ho ti santel, on deuet d'ho kleved,
estlammet gand ho kalloud ha gand ho kloar.
4. Muioh a dalv din ho madelez eged ar vuez,
rag-se ,ema ho meuleudi war va muzellou.
5. Ya, bennoz dech a lavaran 'hed va buez,
en enor d'hoh ano e savin d'an neh va daouarn.
6. Evel gand boued euz an dibab e vo leuniet va ene,
va muzellou o tridal, e kanin ho meuleudi.
7. En noz, ma teu hoh ano em spered,
e choman d'e lavared ha d'e aslavaret.
8. Eur skoazell oh bet evidon,
ha dindan skeud ho tiouaskell em eus tridet lacuen.

oooooooooooooooooooo

EIL LENNADENN - AR RE A ZO EET EN o housk e Jezuz,
Doue o hemero gantañ.

LENNADENN euz lizer kenta sant Paol da gristenien Tesalonik 4/13-17

13. Va breudeur, ne fell ket deom e chomfeñ heb gouzoud ar virionez,
diwarbenn ar re varo.
Na vezit ket glaharet, evel ar re all,
ar re n'o-deus esperañs ebéd.
14. Evid gwir, ma kredom eo maro Jezuz,
hag adsavet da veo,
kredom kenkoulz all
e lakay Doue da adveva gand e vab,
ar re a zo maro e karantez Jezuz.
15. Setu amañ petra a lavarom deoh hervez komzou Doue:
ni, ar re veo, ni, ar re a vo chomet
beteg distro an Aotrou, Or Zalver,
ne vezim ket araog ar re varo.
16. Rag an Aotrou e-unan, pa vo skoet an taol,
gand mouez an arhêl ha trompill Doue,
a ziskenno euz an neñv,
hag ar re varo, hag a zo er Hrist, a adsavo da-genta.
17. Da houde, ni ar re vo beo, chomet beteg neuze,
a vo douget a-unan ganto war ar hoabr,
evid mond da ziambroug or Zalver en êr,
hag evelse e vezim da viken gand an Aotrou Doue.
18. En em frealzit eta, an eil egile dre ar homzou-se.

ALLELUIA ! alleluia ! Beillit eta ha bezit prest,
rag n'ouzoh ket pe da zeiz
e teuo ar mestr.

Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE.

25/1-13

1. Jezuz a gomze d'e ziskibien euz e zonedigez.
Lavared a reas ar barabolenñ-mañ:
- Heñvel eo rouantelez an Neñvou
ouz d'eg plah yaouank,
pedet d'eur préd-eured, a gemeras o lampeier,
evid mond da ziambroug an ozah nevez.
2. Pemp anezo a oa diboell ha pemp a oa fur.
3. Ar pemp diboell o doa kemeret lampeier,
med heb kemeroud eoul.
4. Ar re fur a gemeras eoul e podou da heul o lampeier.
5. O veza ma talee an ozah nevez e teujont oll da voredi ha da gousked.
6. E-kreiz an noz e savas eun hopadenn:
- Setu an ozah nevez ! It er mēz d'e ziambroug !
7. Neuze e tihunas an oll blahed,
hag e preparjont o lampeier.
8. Ar re ziboell a lavaras d'ar re fur:
- Roit deom euz ho eoul,
rag ol lampeier a zo war-nez mervel.
9. Ar re fur a respontas:
- Ne vo ket awalh evidom hag evidoh-c'hwi,
it kentoh da brena evidoh da di ar marhadour.

- IO. Med, endra m'edont o vond da brena,
e tigouezas an ozah nevez.
Ar re a oa prest a yeas tre gantañ er zal-eured,
hag e oe serret an nor.
- II. Diwezatoñ eh erruas ivez ar plahed diboell
hag e lavarjont:
- Aotrou, Aotrou, digorit deom !
- I2. Med eñ a respontas:
- E gwirionez, me lavar deoh, n'hoh anavezan ket.
- I3. Beillit eta, rag n'ouzoh nag an eur nag an deiz.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha leun a drugarez,
pellait diouzon, ni ho ped, kement a vefe a-dreuz d'on hent,
evid ma vim distrob a gorv hag a spered,
hag e stad d'ober a galon vad ho polontez santel.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
taoler eur zell a vadelez war ar provou-mañ:
pa 'z eom da ginnig ar Zakrifis,
gand ar zonz euz Pasion ho Mab,
grit ma kemerim perz ennañ,
gand oll nerz or halon.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Ho trugarekaad a reom, Aotrou Doue,
bremañ p'om bet maget gand ho tonezon zantel;
ha setu e pedom c'hoaz ho madelez:
war an dud a zo silet enno eun nerz nevez euz an Neñv (dre ar gomunion),
skuillit ho Spered Santel,
evid ma talhint da veva e stad a hras.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

oooooooooooooooooooo

33 ed SUL WAR AR BLOAZ

LENNADENN GENTA - Ar vaouez kaloneg a labour aketuz.

LENNADENN EUZ LEVR AL LAVARIOU

(Prov.) 31/10-13,19-20,30-31

10. Eur wreg kaloneg,piou 'ta a hellfe e havoud ?
Talvoudusoh eo eged ar perlez.
11. Enni e laka kalon he gwaz he fiziañz,
hag en he ser n'e-no ket da zicuer, pell ahano !
12. Lakaad a ra anezañ da veza eüruz ha nann gwalleuruz,
setu ar pezh a ra-hi bemdez a-hed he buez.
13. Ober a ra endro d'ar gloan ha d'al lin,
ha dornet eo evid al labour.
19. He dorn a laka ar gegel da vond en-dro
hag he bizied ar werzid.
20. Astenn a ra he dorn da rei d'ar paour,
ha digeri he diwreh d'an den reuzeudig.
30. Touelluz eo koantiri ha didalvez gened.
Ar vaouez a zoujañs Doue,
hounnez eo a zo da veza meulet.
31. Roet dezi lod euz frouez he labour,
ha ra zeuio meuleudi dezi a-wel d'an oll,
diwar heh oberou.

SALM 127

I-2,3,4,5

Diskan: Eüruz an hini...pe: Kaer ha plijuz meurbed...

1. Evuruz neb a vev e doujañs Doue,hag a heuil an heñchou merket gantañ.
2. Diwar labour da zaouarn az-po da zebri;evuruz e vi,ha brao 'vo dit beva.
3. Da wreg,e diabarz da di,'zo par d'eur winienn karget a frouez;
da vugale en-dro d'an daol,par d'ar gwez-olivez yaouank.
4. Ya,evelse e teu bennoz d'an den a zoujañs Doue
5. Ra vi benniget gand an Aotrou,euz lein kêr Zion,bemdez 'hed da vuez.

EIL LENNADENN - Deiz an Aotrou a zigouezo evel eul laer en noz.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN TESALONIK

5/1-6

1. Va breudeur,evid ar pezh a zell ouz donedigez an Aotrou,
n'eus ezomm ebed da skriva deoh war gement-se.
2. Gouzoud a rit ervad e tigouezo deiz an Aotrou,
evel eul laer en noz.
3. Pa lavaro an dud :pebez peoh !
pebez amzer dienkrez !
neuze,end-eun, eo e kouezo an dismantr warno,
en eun taol-kont,

EVEL ar poaniou war ar vaouez dougerez;
n'hellint ket tehed.

4. C'hwi avad, va breudeur,
o veza ma n'emaoh ket en deñvalijenn,
ne gouezo ket an deiz-se warnoh evel eul laer.
5. Rag oll ez oh bugale d'ar sklerijenn, bugale an deiz,
n'om ket euz an noz, nag euz an deñvalijenn.
6. Neuze 'ta, arabad eo deom en em rei da gousked,
evel ma ra ar re all;
beillom kentoh, tehom diouz an dibri hag an eva re.

ALLELUIA ! Alleluia ! Chomit eta war zihun, o pedi e peb amzer,
evid beza e stad vad d'en em gaoud dirag Mab an den.
Alleluia ! Luk. 21/36

pe: Chom fidel beteg ar maro, eme an Aotrou,
hag e roin dit ar gurunenn a vuez !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE.

25/14-30

14. Jezuz a gomze d'e ziskibien euz e zonedigez;
Lavared a reas ar barabolenn-mañ:
- Un dēn, o vond da bell bro
a halvas davetañ e zervicherien,
hag e fizias enno e vadou.
15. Da unan e roas pemp talant, da unan all daou,
ha da unan all unan,
da beb hini hervez ar gouest ma oa.
Hag ez eas kuit.
16. Raktal, an hini e-noa resevet pemp talant,
a yeas d'ē lakaad da dalvezoud
hag a hounezas pemp all.
17. En heveleb doare, an hini e-noa bet daou dalant,
a hounezas daou all.
18. Med an hini n'e-noa bet nemed unan,
a yeas d'ober eun toull en douar,
hag a guzas ennañ arhant e vestr.
19. Pell amzer goude e teu endro mestr ar zervicherien,
hag e reas e goñchou ganto.
20. An hini e-noa bet pemp talant all a dosteas,
hag a zigasas pemp talant all ouspenn,
en eur lavared:
- Mestr, pemp talant az-poa fiziet ennon,
setu pemp all am-eus gounezet.
21. Lavared a reas dezañ e vestr:
- A zo mad tre ! Servicher mad ha feal !
Feal out bet war nebeud a dra,
fiziout a rin kalz ennout.
Deus da gemer perz e levenez da vestr.
22. An hini e-noa bet daou dalant a dosteas ivez
hag a lavaras:
- Mestr, daou dalant az-poa fiziet ennon;
setu daou all gounezet ganin.
23. Lavared a reas dezañ e vestr:
- A zo mad tre ! Servicher mad ha feal !
Feal out bet war nebeud a dra;

fiziout a rin kalz ennout.

Deus da gemer perz e levenez da vestr.

24. O tostaad d'e dro an hini n'e-noa bet nemed eun talant a lavaras:

- Mestr, gouzoud a reen

ez oh eur rust a zén;

eosti a rit eleh n'ho peus ket strewet.

25. Aon a zo kroget annon,

hag ez on eet da guzad ho talant en douar.

Setu en amañ, kemerit ho tra.

26. Med ar mestr a respontas:

- Servicher falli ha lezireg, gouzoud a reas

eh eostan el leh n'am-eus ket hadet,

hag e tastuman el leh n'am-eus ket strewet;

27. mad e tlees neuze beza lakaet va arhant e kampi;

hag o tond endro em-effe kavet va feadra,

gand an interest diwarnañ.

28. Lamit eta digantañ an talant,

ha roit anezañ d'an hini e-neus deg.

29. Rag an hini e-neus e vo roet dezañ hag e-no kalz;

med an hini n'e-neus ket,

e vo lammet digantañ ar pezh e-neus zoken.

30. Evid ar servicher didalvez, stlapit anezañ er mêz,

en deñvalijenn;

eno e vo daelou ha skrignadeg-dent.

FEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Grit deom, ni ho ped, Aotrou Doue,

beza laouen bepred

ouz ho servicha a wir galon,

peogwir n'eus na kaerroh na padusoh eürusted evidom

eged servicha dalhmad Krouer an oll vadou.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,

Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,

a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,

selled ouz ar provou-mañ kinniget d'ho kloar,

evid ma teuo deom, dre ar Zakrifis Santel,

ar hras da jom fidel deoh,

ha da hounid an eürusted peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Resevet on eus, Aotrou Doue, Sakramant an Aoter,

ha bremañ ho pedom a greiz kalon:

ar pezh on eus greet en Overenn gand ar zonz euz ho Mab,

evel m'e-noa lavaret henn ober,

ra dalvezo da lakaad or harantez da greski.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUEL AN AOTROU KRIST ROUE A

LENNADENN GENTA - Deskit ganin e varnin etre dañvad ha dañvad.

LENNADENN EUZ LEVR EZEKIEL

34/II-12,15-17

II. Evel-henn e komz an Aotrou Doue:

- Me va unan a daolo evez ouz va deñved,
hag a intento ouz peb-hini.

12. Evel ma teu ar pastor da veilla war e dropell,
pa vez wardro e zeñved divandennet,
me ivez a gemero soursi euz peb-hini euz va deñved.

15. Me va unan ,a gaso va deñved da beuri,
me a ray dezo diskuiza...Komz an Aotrou Doue.

16. An dañvad dianket,me e glasko,
an hini kollet diwar e hent me e zigaso endro,
an hini gloazet me e louzaouo,
an hini klañv,me e bareo,
an hini a zo lard ha yah,me a veillo warnañ.

Me a vo eur mesaer leal.

17. Evidoh-c'hwi,va deñved, - komz Doue eo -
deskit ganin,
me a varno etre dañvad ha dañvad,
etre meot ha bouhed.

SALM 22

I-2a,éb-3,5-6

Doue eo va Fastor,
ne vanko din netra;
rag war ar peuri druz,
am has da ziskuiza.

gweloud BREIZ A GAN
N° 5 p.4

1. An Aotrou eo va fastor,n'am-eus diouer a netra.

2. War ar prajou geot tener,e ra din gourvez;
daved doureier an diskuiz e kas ahanon,

3a. Ha nerz fresk a ro d'am ene.

3b. Va heñcha 'ra dre ar gwennojennoù surra,evid enor e ano.

4. Ha pa rankfen kerzed dre stankenn an Ankou,
n'am-eus aon rag droug ebéd,rag c'hwi a zo ganin.
Ho penn-baz hag ho kwalenn am laka dineh.

5. Evidon e lakit an daol,dirag sellou va enebourien;
an eoul c'hwêz-vad a skuillit war va fenn,
ha va halir(pe:va skudell) a zo leun-barr.

6. Eürusted,gand ho madelez,a vo va lod,bendez 'hed va buez;
digemer a gavin e ti an Aotrou,epad hir amzer.

.....

EIL LENNADENN - An treh gounezet war ar maro gand Or Zalver
a dalvezo evid an oll dud d'an deiz diweza.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT 15/20-26,28

- 20 Va breudeur, Or Zalver a zo savet a-douez ar re varo,
an hini kenta euz an dud et e kousk ar maro.
21. Evelse, koulz ha ma oa deuet ar maro dre eun den,
dre eun den ivez e teu an adsao da veo.
22. En Adam e varv an oll, en Aotrou Krist o-do an oll ar vuez en-dro,
23. med peb-hini en e renk: an Aotrou Krist da genta penn,
diwezatah ar re 'zo d'an Aotrou Krist, da geñver e zistro.
24. Da houde, e vo echu peb tra,
pa lako e rouantelezh etre daouarn Doue, e Dad,
goude beza diskaret peb nerz ha peb galloud a-eneb.
25. Rag eñ eo a dle kaoud ar garg a roue,
kén na n'o laket an oll enebourien dindan e dreid.
26. Hag an diweza enebour da veza diskaret a vo ar maro.
28. Neuze, pa vo peb tra dindan e halloud,
ar Mab e-unan en em lakay dindan galloud an Tad,
e-no lakeet peb tra da zuja dezañ,
hag evelse e vo Doue peb tra e kement tra 'zo.

ALLELUIA ! Alleluia ! Ra vo benniget rouantelezh David, on Tad,
rouantelezh an anzeriou nevez.
Ra vo benniget en ano an Aotrou,
an hini a zo o tond. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 25/31-46

- Jezuz a gomze d'e ziskibien euz e zonedigez,
hag a lavare:
31. - Pa zeuio Mab an den en e hloar,
gand an oll êlez gantañ,
eh azezo war e droun a hloar.
32. An oll boblou a vezo dastumet dirazañ,
hag e tispartio an dud an eil diouz egile,
evel ma tisparti ar pastor an dañvadezed diouz ar bouhed.
33. Hag e lakay an dañvadezed en tu deou dezañ,
hag ar bouhed en tu kleiz.
34. Neuze e lavaro ar roue d'ar re a vo en tu deou:
- Deuit, tud benniget gand va Zad,
resevit an eritaj, ar rouantelezh a zo bet pourchaset evidoh,
azaleg krouidigez ar bed.
35. Rag naon am-eus bet, hag ho peus roet din da zibri:
sehed am-eus bet hag ho peus roet din da eva,
estranjour e oan hag ho peus roet din repu.
36. Noaz e oan hag ho peus va gwisket,
klañv e oan hag ez oh deuet d'am gweled,
er prison edon, hag ez oh deuet betek ennon.
37. Neuze e responto dezañ an den just:
- Peur, on-eus-ni ho kwelet o kaoud naon,
hag on-eus-ni roet deoh da zibri ?
O kaoud sehed, hag on-eus-ni roet deoh da eva ?
38. Pe vare on-eus-ni ho kwelet estranjour,
hag on-eus-ni roet deoh repu ?
Noaz hag on-eus-ni ho kwisket ?
39. Pe vare c'hoaz on-eus-ni ho kwelet klañv pe er prison,

hag ez om-ni eet davedoh ?

40. Hag e responto ar roue:
- E gwirionez, m'hen lavar deoh,
bewech, m'ho po greet kemend-all
d'an disterra euz va breudeur,
d'in-me va unan eo ho peus henn greet.
41. Neuze e lavaro d'ar re a vo en tu kleiz:
- It pell diouzir, tud milliget ahanoh,
d'an tan a bado da viken,
bet c'houezet evid an diaoul hag e êlez,
42. rag naon am-eus bet ha n'ho peus ket roet din da zibri,
sehed am-eus bet, ha n'ho peus ket roet din da eva,
43. estrañjour e can ha n'ho peus ket roet din repu,
noaz e oan ha n'ho peus ket va gwisket,
klañv hag er prizon, ha n'oh ket deuet d'am gweled.
44. Neuze int-i a lavaro:
- Aotrou, peur on-eus-ni ho kwelet naon deoh,
pe zehed, estrañjour, pe noaz, klañv pe er prizon,
ha n'om ket deuet war ho sikour ?
45. Hag e responto, en eur lavared:
- E gwirionez, m'hen lavar deoh:
bewech ma n'ho-peus ket greet kemend-all
evid unan pe unan euz ar re zister-se,
din va unan an hini n'ho peus ket henn greet.
46. Hag ar re-ze a yelo d'ar boan a bado da viken,
hag ar re just d'ar vuez ne vo fin ebéd dezi.

PEDENN AN DICOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, en ho Mab karet, ROUE ar bed a-bez,
eo fellet deoh adsevel hag unani an oll draou krouet;
Plijet ganeoh eta, ma vo an oll grouadurien,
distag drezañ euz liammoù peb sklaverez,
douget d'ho servicha laouen ha d'ho meuli da viken.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

En eur ginnig deoh amañ, Aotrou Doue, ar Zakrifis
a laka gouenn an dud da gaoud adarre ar pech,
e houlennom gand doujañs ma roio ho Mab e-unan d'an oll boblou
ar hras da veza unanet ha da gaoud ar pech kenetrezo.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR C'HRIST ROUE :Levr-Overenn p.48

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Resevet ganeom magadur ar vuez peurbaduz,
ni ho ped gand fizians, Aotrou Doue:
ni hag a zo eun enor evidom senti da Lezenn an Aotrou Krist ROUE ar bed a-bez,
ra vim gantañ e Rouantelez ar Baradoz.
Drezañ, Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

Kemper d'an 10 a viz here 1972

+ Visant FAVE, eskob-skoazeller.

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an Eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon

PEB TRA A DREMEN...

- I. 'Vid peb den ar vuhez 'zo tenn,
kaer en-eus kaoud levenez,
kaer en-eus kaoud yehed ouspenn,
e kavo eun deiz ar bez.
Warlerh heol z'eus tenvalijenn,
warlerh deiz e teu an noz.
Er bed-mañ, peb tra a dremen,
koulz an den eged ar roz.

2. An deliou endro deom a gouez,
ar bleuniou a goll o sked,
ken buan e teuz ar gened,
ken bresk all eo ar vuhez.
On ene avad a nijo
en tu all d'an oll stered,
hag eno, eo e kavo tro
da danva an eurusted.

Job - 1969

KENAVO D'AN EURUSTED

- I. An heol a hell rei e sked,
rod an anzer a dro.
An heol a hell rei e sked,
peb den a dremenno.

Kerz dineh euz ar bed-mañ,
diskan warzu peoh ar bed all,
rag ar vuhez er bed-mañ

2. Kenavo d'an eurusted,
ha da gerz da vuhez !
Kenavo d'an eurusted,
araog diskenn er bez !

3. Da hortoz splannder an Neñv,
bez e peoh gand ar bed.
Da hortoz splannder an Neñv,
bez dinec'h a spered !

Job - 1970

PEDENN DIOUZ AN NOZ

I

Gand ar serr-noz, Doue,
 gand ar serr-noz,
 ra gouezo em ene
 gliz da vennoz !
 Distro eo da zanyad,
 n'am lez ket emzivad.
 Euz lein da Varadoz,
 skuill da vennoz !

2

Dindan da zell, Doue,
 dindan da zell,
 m'eus bevet 'hed an de,
 'vel da vogel.
 Hentchet ha skoazellet,
 diouz an droug divennet,
 gand an deiz o vervel,
 klev da vogel.

3

Euz va halon, Jezuz,
 euz va halon,
 e sav karantezuz,
 galv ar pardon.
 Strodenn hudur ar bed,
 em ene 'zo silet.
 O, trugarez, Mignon,
 Pardon ! Pardon !

4

Deus d'am zikour, Jezuz,
 deus d'am zikour !
 An noz 'al zo trañsuz,
 heb eür gedour.
 E traonienn an daelou,
 beteg mond d'an Neñvou,
 eneb an Enebour,
 bez va Gedour !

BENNOZ DEOH, VA DOUE...

Bennoz deoh, va Doue, evid ar bokedou,
o deus skedet ken flour em henta bloaveziou;
o huez vad 'zo chomet em halon da viken,
hag o deus tenereet, em buhez, peb anken.

Bennoz deoh, va Doue, bennoz deoh evid va namm,
a zeskas din tanva er bed an traou dinamm;
hag e barr an Neñvou, an Tad oll-halloudeg,
a deuas d'am gervel da veza e veleg !

Bennoz deoh, va Doue, bennoz 'vid ar perlez,
a zo kouezet ken puill, ahont en eur barrez,
etre Sant Ibilio hag an Anterludu,
baradoz an douar ! Va zenzor: Sant Pabu.

Bennoz deoh, va Doue, evid an eneou,
evid an eost santel, grignoliet en Neñvou,
ha truez, o va Zad, truez 'vid an eoster,
da veza bet er park, awechou dibreder.

Bennoz deoh, va Doue, evid ar vugale,
a jom o dremmou koant va hurunenn lore,
bennoz 'vid o mouzhoarz, evid o halon zrant,
o mouez a zirlink evel peziou arhant.

Bennoz deoh, va Doue, evid ar vignoned;
diredet davedon euz pevar horn ar bed,
hag o deus digoret d'o mignon dor o zi,
bennoz deoh, va Doue, 'vid kement a zudi.

Bennoz deoh, va Doue, evid an oll vleuniou,
a zispakit bemdez war va zro a verniou;
n'on ket din ! N'on ket din euz a gement a roz!
Dalhit lod, va Doue, evid ar Baradoz !

Mab an Dig

AL LEALDED

An den gwella bet biskoaz
zo bet staget ouz ar groaz,
ha ma vefen gwir den santel,
e vije greet deom-ni heñvel.

An neb a glask al lealded,
beteg ar penn, a vo lazet.
Ez al lezenn pa n'eus enni
netra eneb madou va zi.

Ez eo prezeg gand konzou flour,
a red kerkent gand tiz an dour.
Diesoh kalz ez 'eo derhel,
beva Lezenn an Aviel.

An neb e karg hag a venno
lakaad urz vad da ren er vro,
a vo draillet gand ar re oll
o divije arhant da goll.

Al lealded, bleunienn rouez,
eun Doue leun a vadelez,
zo diskennet euz an Neñvou,
d'he skoazella da rei skourrou.

Lazet eo bet hag e sonjed:
setu maro al lealded !
Med, o burzud ! ar bez digor !
al lealded e toull an nor.

Beteg ar fin, tud a zavo,
da heul ar Mestr hag e bevo,
beteg ar fin, e vint breset,
ouz ar groaz e vint staget.

Biken avad, den n'o zrehc,
pegwir Doue a zo ganto.
En tan, er mor hag er vered,
eh embannint al lealded.

Man an Dig

SENT KARET OR BREIZ-IZEL

Evid ar Vretoned divroet

ton: Patronez dous ar Follgoad

diskan

1. Evid gounid or buhez,
on-eus kuiteet or bro,
med ennom he harantez
atao a drid bero.
Ni a wel on ilizou
gand o dantelez flamm,
endro e teu pedennou
a zeskas deom or mamm.
2. Sent karet or Breiz-Izel,
euz a varr an Neñvou,
digasit deom ho skoazell,
da vale war roudou
ar re o deus kizellet,
etre divrec'h ar mor,
gand o feiz hag o spered,
broig koant an Arvor.
3. Ni glev ar mor o trouzal
war dreuzou eur chapel,
hag an avel o sourral,
war or hroaziou santel.
Ni a wel ar Vretoned,
o tond a vilierou
hag o pedi daoulinet,
da zeiz or pardonieu
3. Sent brudet or parrezioù,
grit deom, oll, ni ho ped,
tanva endro tenzorieu
or bro muia-karet,
ha mond, eun deiz, da greski
niver an dud santel,
er baradoz, da bedi
evid or Breiz-Izel.

Mab an Dig

+°+°+°+°+°+°+°+°+°+